

ARGUZ

Mamm-gozh, aet kuit re abred, va dostaas daoust d'he bolontez, ouzh ur pelle'henderv, aet er-maez a wel abaoe 'pell'zo, hag a lodenne ganin ha gant un nebeut all he skortig hêrezh : ur c'hozh-ti bihan , dilaosket abaoe re bell amzer ha prest da gouezhañ 'n e voull. Met Mamm-gozh a gouezhas buannoc'h eget toenn hec'h annez, ur brouenn ma 'z eus war an tamm douar 'mañ un urzh en tevetegezhioù

Ne ehane ket, ar c'henderv-se da barañ e selloù ouzhin e-pad m'edomp an daou oc'h en em dommañ en ostaliri ar c'horn goude lid an douaridigezh. Perak an Diaoul e fell d'hor c'herent-nes mervel e Kerzu pe e Genver e-pad ma skorn ken a frailh ar gwez? Ha fellout a rafent dre-se lakaat ac'hanomp da grediñ e karfent bezañ ambrouget e-pad o beaj diwezhañ, hag, erfont, pas gwall zrouklaouen d'hor gwelout o pakañ ur skeventfo etretant. Edon beuzet em soñjoù, p'en ur sevel ma fenn diouzh ma bolennad chokolad tomm e kejas ma sell ouzh ec'h hini , ur sell glas dir, pistrius, paret warnon:

-- Felix , ma n'en em drompan ket ez out mab d'am moereb Anastasia ?

Santout a raen en e c'houlenn, ur gasoni gozh o tiwanañ .. ret eo din e ansav : e sell skornek va lakaas diaes hag abafael, hag eñ da gendalc'hiñ :

-- Dek vloaz koshoc'h eviton out, neketa?

-- Ya, posubl eo, emezon

-- O nann , n'am eus ket disoñjet!

Ha dre ma zispourbelle ma daoulagad, o klask gouzout dre ar sell e pelec'h edo o klask kas ac'hanon gant seurt gerioù ...em lavaras g'un ton put

-- Amerdiñ 'rin ac'hanout betek da gas sot ! n'out ket prest c'hoazh da gaout da herezh digant mamm gozh Josephine, ha gouzout a ran mat, ha daoust dit bihan c'hoazh da neuze, ma lugernes dijà ouzh an daou lestr oberiet diwar envezioù obuzioù ar brezel pevarzek! Ya, soñj vat 'm eus, d'az kwelout, ar sell troet war-du mantell siminal ar sal o lugerniñ an daou lestr kozh kouevr-se puret g'ar Miror ! Bez' e c'hellez gortoz paotr , biken ne vint dit. Ouzhpenn-se, al listri-se a zeu eus tu ma zad , e dad-kozh an-unan o vezañ graet ar brezel pevarzek!

-- Met penaos neuze en em gavjont e ti Mamm-gozh Josephine ?

Ma c'henderv a stouas e benn, evel jenet dirak ma sell goulennus ...

-- Se 'zo... ur sekred tiegezhel...

A-daol-trumm edo dres ar c'henderv Gabriel da zivorfil ma c'hoant gouzout muioc'h...

-- Ac'hanta, Gabriel! Rak gwir eo Gabriel da anv neketa? Ha diskuilhet 'teus din pe..re a draoù ... pe... pas trawalc'h ...displeg din tout bremañ neuze !

Gabriel 'en em dortilhas war e gador , a doc'hellas ur wech pe ziv, a-raok adkregiñ

-- Evel 'm eus lâret dit dijà , dont a reont diouzh tu ma zad!

-- Ya, a respontis , diouzh ma eontr da heul ...

-- Dres ! Ha, penaos lâret , Mamm-gozh Josephine he deus bet ...c'hummm...santimantoù...evit tad ma zad...hag evit he garedoniñ hag he frouiñ e garantez eo, m'en doa profet dezhi an daou lestr-se.

-- Hañ! ma Mamm -gozh Josephine ha da dad-kozh Alfoñs ? a estlammis ...

-- Pa lavaran dit ! da vamm-gozh Josephine ha da dad-kozh Alfoñs !ya ! N'eo ket ret din dilostañ dit ar babu! Ha setu.. dont a ra al listri eus ma zi !

-- Ha beñ ! Gabriel, ne gollent ket o amzer, hon hendadoù!

E sell a chome taer. Santout a rae ne oan ket bet distablaet gant ec'h arguzennoù

-- Met erfin Gabriel , ken grevus e vefe evidout ma zeufen a benn da adaptapout an daoù lestr-se?

Gabriel a stegnas evel ur wareg hag o parañ warnon e selloù tenn e kendalc'has :

-- Biken ne laoskin al listri-se mont d'an hini en deus poket din ma Nanarzh !

Sellout a ris outañ, mantret:

- Da nanarzh? pebezh nanarzh?
- Ma hini 'vel just ! Pe hini all panevetañ ?
- Ya, met pezavare hag e pelec'h?
- E ti Mamm -gozh Josephine 'vel just ! disoñjet 't eus ?
- Sur awac'h ma Doue !
- Falloc'h c'hoazh out eget ma sonjen !
- Met d'az oad, Gabriel, 'teus ket ezhomm mui eus un nanarzh koulskoude !
- Nann, ur bennaenn eo ! pas muioc'h!
- N'am eus soñj ebet mui eus an afer-se ...met ma 'z eo un amplegat evidout...

Nebeut amzer war-lerc'h-se , un noter diseblant, lart ha pilous, 'en em gavas e ti Mamm-Gozh Josephine evit ober ar rann eus madoù treutik ar vamm-gozh. Ret e oa bet din kannañ start diskouezh pedagogiezh, lubanerezh ha plaended evit derc'hel evidon listri ar Brezel Bras , a zegase d'am soñj ma mamm-gozh enoret . A-benn ar fin, ma c'henderv Gabriel a echuas d'en em renkañ d'am arguzennoù met ivez da re an Noter ha d'en doa nemet ur pal : echuiñ an afer-se ar buannañ ma posubl.

N'eo nemet pa zougis ma zaoù lestr em divrec'h, ma taolis dre zegouezh ur sell e diabarzh unan anezho. Hag aze! pebezh sorprend ! Ne oa ket goullo ! 'tennañ ris dioutañ un nanarzh dre e skouarn, hag e reiñ, lidus, etre daouarn ma c'henderv ...ha dirak Noter mar plij !

Jean Pierre Moalic, "Litige"
Troet diwar ar galleg gant Loeiz Gwilhou